

Karol bretoneg ar Sant Karanteg

1. Patron Karet hor parrez, Aotrou Sant Karanteg
Pedit evit domp bemdez, gant ho feiz kalonnek
Grit ma zeimp beteg Doue, goude pred ar maro
Dalc'hit sonj eus hon ene, dalc'hit sonj eus hor Bro
2. Hirio c'hwi 'zo en envou, gant sent koz Breiz-Izel
Beillit c'hoaz war hon aochou, hore-ier hor chape
Ha pa zeomp beteg Mari war enezen Kallot
Bezit ganeomp ho pedi, er parke-ier en od.
3. Gwechall c'hwi 'peus prezeget, 'Aviel en hor Bro
Sant Karanteg beniget, ganeomp chomit atao
Pedit 'vimpad hor buez ouz an Iliz sentuz
Gwir bugale ar verc'hez dorn ha dorn gant Jezuz.
4. 'Neur diskouez ar Baradoz, aman war ar garrek
O peus henchet ar'regoz, Abad Sant Karanteg
Hirio ar bed 'zo tenval, an eneou dallet
Bezit tour tan o Iuial, war hor buez bepred

R/ Meulomp holl gant levez, kanomp a greiz kalon

Kenta pastor ar Barrez, Sant Karanteg hor patron